

KANTIK ZANT JAKES

PATRON LOKIREK

War don : *Jezuz, pegen bras e.*

DISKAN : Hon faeron sant Jakes,
Tad ar vartoloded,
Reit d'imp bepret furnez
Gant yec'hed ha pesked.

Konnaret 'vel ar mor,
Satan zo trouz gant-an ;
An ifern zo digor,
Digor braz d'hon lonkan.

Redeg a ra ar bed,
War-lerc'h an ineo,
Ha, mar na zikouret,
War-n-omp e c'honeo.

Lemel a rei o fe
Digant ar Vretoned !
Liez ar wirione
Gant ar gaou zo trec'het.

Kenavezo neuze
D'ar peuc'h ha d'an urz vad !
Anez doujans Doue,
Nemet trouz ne ve kâd.

Ar fe en ti ar paour
A zo well 'vit mado ;
Na plijadur, nag aour
Na digor an Nenvo.

Nag aour, na plijadur,
Na ro evurusted :
En ti ar c'hristen fur,
Eno e vo kavet.

Miret ar martolod,
A zo pell, sant Jakes,

'Vit ma teuio devot
Da bedi d'ho parrez.

Miret-han didamall
Du-hont pell diouz ar ger :
Du-hont e ver ken fall,
Hag hen zo ken dister.

Leviet c'hoaz hon bago
Du-hont mesk ar gerek,
Hag er ger hon devo
Hon bara pemdeiek.

Lokirek eo ho pro,
Zant Jakes binniget,
Roet d'he douaro
Bennoz Doue bepret.

Ni fell d'imp c'hoaz bear
Tud evel hon zud koz,
A glaske da gentan
O lod er baradoz.

Yec'hed, boed ha dilhad,
Treoigo an douar,
Hon do war ar marc'had,
Rak Jezuz hel lavar.

Binniget hon bago,
O tad karantezuz,
Tolet war hon foanio
Eur zell trugarezuz.

Ha bep bla vo laret
War ocho, war gerek,
N'euz ket muoc'h pleustret
'Vit pardon Lokirek.

Er baradoz emberr,
Du-hont holl en eur voez,
Ni a gano zeder :
Trugare, sant Jakes !

Imprimatur :

Brioci, 15^a junii 1900.

M. LE PROVOST, v. g.